

Ar rodoù avel (Les roues à vent)

Un grand danger nous menace ! Et si, à force de construire des éoliennes un peu partout en Bretagne, celle-ci finissait un jour par s'envoler ?

Ur c'hiz nevez 'zo erruet un nebeud bloavezhioù 'zo
Ya, da blantañ rodoù-avel un tamm pep lec'h 'barzh ar vro

Ya, da blantañ rodoù-avel pere 'gemer kalz a blas
Ken uhel ha ken ledan int, 'weler nemeto er meaz

Ken uhel ha ken ledan int, pa seller ne' en neac'h
Diwall da bakañ ur penngamm rak graet e vez aes a-walc'h

Diwall da bakañ ur penngamm pe c'hoazh da vezvijenniñ
Rak gant an avel 'zo er vro 'vezont atav o treiñ

Rak gant an avel 'zo er vro 'troont atav diastal
'N deiz bennak 'vo kement diouto, mont 'raio Breizh da nijal
!

Ha bremañ hep farsal ken, bretoned benniget
Savomp holl hor mouezh 'enep d'ar rodoù-se dirollet

Savomp holl hor mouezh 'enep d'ar tourioù-se direzon
Ya, gant pennoù bras Paris 'zo bet impozet deomp

Ya, 'zo bet impozet deomp gant pennoù bras Paris
'Vel ma oa bet ivez gwechall ar central Brennilis

'Vel ma oa bet ivez gwechall al loen fall-se vil mar zo
'Tal « dorioù ar Baradoz » kaerañ lec'h 'zo er vro

Rak ar c'hozh mikanikoù-se, 'zo toud muntrezed
Gant o eskell houarn spontus pa falc'hont an evned

Gant o eskell houarn spontus pa falc'hont an evned
Ar re vras koulz ha re vihan, ma Doue pebezh lazhadeg !

Zoken an eskell-kroc'hen na vezont ket espernet
Bemdez e harz an tourioù o c'horfoù a vez kavet

Bemdez e harz an tourioù o c'horfoù a vez kavet
O c'hourvezañ a zegadoù, ur rann-galon da welet !

Ma lezomp se da ober, hep lavar gaou 'benn nebe't
Na chomo ken e-barzh ar vro, tamm loen-nij ebet !